



GOUELIOU BRAZ SANT ERWAN



KANTIK AR BARADOZ

Sheet music for Kantik ar Baradoz. The music is in 8/8 time and consists of two staves of musical notation.

Text under the music:

Je - zuz pe - gen bras ve Pli - ja - dur an e - ne Pa vez e gras Dou - e Hag
 en e ga - ran - te Pa vez e gras Dou - e Hag en e ga - ran - te.



1. Berr 'kayan an amzer
Hag ar poaniou dister,
O sonjal deiz ha noz } (bis)
E gloar ar baradoz.
2. Pa zellan en nenvo,
Etrezeg va gwir vro,
Nijal di a garfen
Evel eur goulmig wenn.
3. Pa vo pred ar maro,
Neuze me 'gimiado
Diouz ar hig ankeniuз,
Enebour da Jezuz.
4. Gortoz a ran gant joa
An termen diweza :
Mall am eus da weled
Jezuz va gwir bried.
5. Tremen a rin al loar
Evit pigna d'ar c'hloar;
Dreist an heol, ar stered,
Me a vezou douget.
6. Aet pell diouz an douar,
Traonienn leun a c'hlac'hар
Neuze me ray eur zell
Ouz va bro Breiz-Izel.

KANTIK SANT ERWAN⁽¹⁾

Diskan

Nann, n'eus ket e Breiz, nann n'eus ket u - nan,-

Nann, n'eus ket e vel sant Er - wan —

Nann, n'eus ket e vel sant Er - wan.

Nann, n'eus ket e vel sant Er - wan.

1. N'eus ket en Argoad, na mui en Arvor,
Koulz ha sant Erwan 'vid an dud a vor.
2. Nann, n'eus ket er vro, 'vel ma lavarer,
Hag a ve ken mad 'vid al labourer.
3. N'eus ket kaeroh skouer d'an dud a lezenn
Eged sant Erwan, skouer ar veleien.
4. Ha d'ar beorien gêz ha d'an dud a boan,
Nann, n'eus ket gwelloh egod sant Erwan.
5. N'eus ket cur japel a beder enni
Gand mui a galon 'ged er Vihini (2).
6. Ma 'fell deoh an tu da gaoud ho mennad,
Pedit sant Erwan, ha pedit ervad.
7. Pegen mad pedi, pa vez poan-spered,
E-leh ma pedas ar Zant benniget !
8. Pegen brao pleustri an douar santed
Bet pleustret gwechall gand Sant Breiz-Izel !

(1) Red eo gouzoud e vez roet d'ar zant-mañ kalz anoiou disheñvel, hervez ar hornbroiou : Erwan, Ewan, Ewen, Iwen, Iwan, Youen, Ivon, Yon, Eozén, Euzen, Cheun. Oll e teuont moarvad diwar ar stumm koz : Ezwaen.

(2) Ar Vinili, amañ, eo Minihi-Landreger : war zouar ar barrez-se, e maner Kervarzin, e oe ganet St Erwan, er bloaz 1253.

ADOROM OLL

A - do rom oll e Sa - kra - mant an Ao - ter Dou - e ku - zet, Je - zuz, or
 mestr, or Zal - ver. Spe - re - jou e - vu - ruz, E - lez ar Ba - ra - doz, Gand
 ka - ran - bez a dan, meu - lit hen deiz ha noz, Meu - lit hen deiz ha noz.

Gwir Vab Doue, en em hreet den d'or prena,
 En osti sukr ho kuzet 'vid or maga;
 Plijet ganeoh skuilha, euz ho tron an ôter,
 Warnom daoulinet cman, ho pennoz, va Zalver,

Enor ha gloar, ha karantez da Zoue,
 D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel ive.
 Ra vezo e peb leh an oll grouadurien
 Aketuz d'e veuli hirio ha da viken.

DA FEIZ ON TADOU KOZ

Diskan

Da feiz on tu - dou koz, ni pô - tred Breiz I - zel, Ni
 zaïch'io mad a - to; 'Vid - feiz - on ta - dou koz hag en - dro d'he ba - niel, Ni
 oll en em star - do Feiz ka - ret on ta - dou, mor - se ni ho na - ho, Ken -
 toh ni a var - vo. Ken - toh ni a var - vo

1.

D'ar hrouadur bihan, e kichenig e gavell
 E lakit eur vamm vad en deiz evel en noz;
 Er boan hag en anken, hi a daol buan eur-zell
 War groaz santei Jezuz he sonj er baradoz.

2.

D'ar pôtr, d'ar plah yaouañk, c'hwi 'ziskouez hent ar furnez,
 C'hwi 'lavar: « It gantañ heb krena dirag den ;
 Bezit, tud yaouañk Breiz, bezit epad ho puhez
 Ato gwir gristenien, treitourien birviken ! »

3.

D'an den diwar ar maez, kenkoulz ha d'an den a vor,
 C'hwi a ro nerz-kalon da stourm er boan ato ;
 Gouzoud a reont en neñv e kavint oll dor zigor ;
 Ar vuhez 'vo bet tenn ; d'an drubuilh kenavo !